

AR VOT E POULLAOUEN

1

Klevet em eus man an Otrou Mêr
C'hober tro ar baroz gant e voutou lêr...
Klevet a raon laret an eus poan-benn
E klask tud da vonet war e listenn !

Setu aze evit petra
Me rank gwell sklêr rok vota !!

2

Monet ra gantan e daou « agent »,
Evel d'ezan, chanchet tro d'o chupenn...
Monet rank d'ober tout tro ar baroz,
Antreal brao, diweat deus an noz !

Setu aze evit petra
Me rank gwell sklêr rok vota !!

3

Penos gav d'eoche ' gavint konsailerian,
Gant eun den an eus kollet e skiant?
...Chechet e vezdiwar-bouez e fri,
Barz an tier evit o flati.

4

N'eus pell, komiz braz ar Saizy
Oa bet gwellet 'barz ar Sacristi
Touch an aluzen evit ar veleien :
Sosialist bras gwechall, breman' zo gwenn !

5

Eur fortun gounet d'ezan gant e dad,


i !!!

7

An dud fur-ma deus formet o listenn :
Hag e-barz n'eus ket nemet re wenn !
Eur famil seulamant deus ar re-man vras
Zo klask eur chupenn evit 'benn warc'hoaz.

8

Choazet breman, republikaned,
Etre noblansou ha sosialisted.
Komzou flour re wenn na vint ket chilaouet :
Poullaouen 'zo ru hag a jomo ru bepred !



Setu ar votadeg e Poullaouën.
Saliou neus chanchet e chupen.
Ar vechal oa ru, ar vechman e gwenn ;
Ra nemet trômp electourien.

Daou agent-mair neuz gret ive
Er blavez daou e mis mae :
Partiet int gant Dilasser
A gant Loheac Pierre.

Partiet in bars e auto
Evit ober tro ar vro.
Dont d'ober tro da Poullaouën,
N'ent guisket bep a chupen venn.

Profitet a fell d'e ober
O tri m'en klask m'ont d'a ver.
Job Jigoude a lavare :
Mar galan me a vez an ne.

Yves ar Bec hoari dre zindan,
Partout na klasc'héo an tann
N'eur ober eur zel deuz corn e skoa.
Pierre Saliou ne dalve netra.

Pa vo echuet ar votadeg,
Chomo n'y vele da gousket
Elech monet a seven
Ar pez neuz bet prometet.

Chom reibars arguer d'ober chikalandouz,
D'ober tro en ti evel eur marmous,
D'ober tro en ti e kichen e vreg.
Aze enne never ar Beg.

Yves ar Bec deus Roskornaou
Neus mesket kalz a draou
Heb mont pel deuz ar guer.
Brao e passeel amzer guer.

A rese, ma mignonet,
En desir d'o gouarnet.
Mez ar pez n'expliquet ket
Evit petra n'eus trahisset.
Troet in bet var en tu guenn,
Passeet int e tu Lancien.
Enez a so penvidik braz :
Laquet neuz kalz da chanch chupen hoas.
En Lancien zo evit ar re vraz.
Eneb d'ar paour e bet a viscoaz.
Tennet en deuz digante o peadra
Pa neuz votet en « décrets-lois ».

Votet en neus lesen en ed
Henep d'eomp ma hed-a-hed.
Evelise, camaradet.
Votit evit ar socialisted.

Labour-start zo bet evit sevel listenn ar re wenn :

Renket deus al Lancien dont da zikour ar Saliou da zevel anei !

En em zervijet neus al Lancien deus-ouzit, P. Saliou... ha breman eman o prepari skuba 'haout mêz ! Setu ar pez n'o talvezet d'id trahisa da gamaladed gwechall !

